



Ar c'hroaziadegoù e reter ar mor Kreizdouar (1096-1291)



Goulenn diazez : E peseurt mod o doa kemeret perzh ar Vretoned er C'hroaziadegoù e reter ar mor Kreizdouar ?

Kelc'hiad 4 – 5^{vet} klas – Eus ganedigezh an islam betek kemeridigezh Baghdad gant ar bobl Mongol : galloudoù, kevredigezhioù, sevenadurioù




Gervel a reas ar pab Urban II an dud fidel, e miz Du 1095, da vont da zieubiñ an « Douar santel » bet aloubet gant an Durked, muzulmaned anezho. Kroaziidi a voe graet eus an dud a yeas da gemer perzh en ergerzhadegoù-se dre ma veze gwriet ur groaz lien war o dilhad. Gant ar spi da gaout ar baradoz e fin o buhez pe c'hoazh da binvidikaat e kemeras ar groaziidi hent an Douar santel.

Ar re gentañ o respont d'ar galv-se e miz Ebrel 1096 a voe miliadoù a dud paour da-heul ur manac'h gall anvet Pêr an Ermit; flastret e voent gant an Durked e Konstantinopolis, pell-tre c'hoazh diouzh douar ar C'hrist.

E miz Eost 1096 e loc'has un 30 000 bennak a varc'heien gristen eus Europa ar C'hornôg, Franked dreist-holl (diell 1). Kemeret e voe Jeruzalem ganto e 1099 ha krouet Stadoù latin ar Reter (diell 2).

1 Kentañ kroaziadeg ↓

2 Stadoù latin ar Reter →



Barregezhioù


- En em lec'hiañ en amzer istorel.
- En em lec'hiañ er spas.
- Dielfennañ ha kompren un diell.
- Implijout modoù-lavar disheñvel.

Ar Vretoned er c'hroaziadegoù : noblañs Breizh en Douar santel

N'eus ket kalz a Vretoned hag o defe tapet brud vras e-kerzh ar c'hroaziadegoù met eus ar penn-kentañ e 1096 betek fin an ergerzhadegoù-se e 1291 e kaver memes tra dalc'hmat aotrouien eus Breizh – Breizh-Uhel dreist-holl – oc'h en em gannañ en anv ar C'hrist hag hervez kronikerien ar mare-se ez eo e 1218 e kaver ar vandennad vrasañ a soudarded eus Arvorig eno : 6 000 a-hervez¹.


1. Diaes eo kaout ur sell pizh war an niver a berzhidi rak n'eus listenn glok ebet, e Breizh pe e lec'h all, eus ar re a oa aet betek an Douar santel.

E-mesk ar Vretoned o doa kemeret perzh er c'hroaziadegoù e c'hallomp menegiñ tri dug eus ar vro aet betek an Douar santel evel kroazidi :



Alan IV Fergant, bet dug etre 1084 ha 1115, hag aotrouien all eus an noblañs uhel o doa kemeret perzh e kemeridigezh Jeruzalem da-geñver ar c'hentañ kroaziadeg (1096-1099). Loc'het e oa an dug eus e vro e 1096 ha distroet e oa d'ar gêr war-dro 1101.

Estreget Alan Fergant, n'eus dug all ebet en defe taolet e dreid en Douar santel e-kerzh an ^{xii}^{vet} kantved. Ret e vo gortoz an ^{xiii}^{vet} kantved hag ar seizhvet kroaziadeg (1248-1254) evit klevet komz eus daou all anezho du-hont :



Pêr I^{añ} Brizhkloareg, bet dug eus 1213 betek 1237, a gemeras perzh adalek 1248 er groaziadeg gant Loeiz IX, sant Loeiz. Ne oa ket dug ken d'ar mare-se rak laosket en doa e blas d'e vab Yann I^{añ}. Enor bras a dapas : a-boan en em gavet eno e kredas gant 200 marc'heg all tagañ ur garavanennad muzulmaned leun a voued ganto. War-lerc'h e tiskouezas nerzh-kalon bras ha nerzh-korf da-geñver emgann Mansourah en Egipt, ur c'hastell bet adaptet gant ar vuzulmaned e 1250. Gloazet, e varvas eno er bloavezh-se. Anvet e voe gant an nobled frank : « *le bon conte Pierre de Bretagne* », brudet evit e nerzh-kalon.



Yann I^{añ} ar Rouz, mab Pêr Brizhkloareg, dug Breizh etre 1237 ha 1286, en doa kemeret hent an Douar santel e 1270 gant sant Loeiz ivez, met rankout a reas distreiñ d'ar gêr pa varvas ar roue a-raok en em gavout betek penn ar veaj. Mont a reas mab Yann I^{añ}, anvet Yann ivez, betek Siria memes tra gant ur strollad kroazidi all ha ne zistroas d'ar gêr nemet tri bloaz war-lerc'h.



↑ Ur c'hroaziad
Levr salmoù Westminster, tro 1250.



➔ Ur siell evel homañ a veze lakaet war baperoù ofisiel evit prouiñ e oant bet savet gant an noblañs-mañ-noblañs

Treset e oa bet sielloù ar bajenn-mañ evit levr Dom Morice *Mémoires pour servir de preuves à l'histoire ecclésiastique et civile de Bretagne* (1742-1746) diwar sielloù orin duged Breizh, bet savet da vare pep hini anezho.

An urzhioù brezel e Breizh

A-benn difenn ar Stadoù latin nevez krouet met ivez ar birc'hirined o vont betek Jeruzalem e oa bet savet urzhioù brezel e bloavezhioù kentañ an ^{XII}^{vet} kantved : ar venec'h marc'heien. En o zouez e oa an **Demplourien (menec'h**

ruz) hag an **Ospitalerien (menec'h du)**. Karget e oant da zifenn ar Stadoù latin, da wareziñ ar birc'hirined war an hentoù ha da reiñ bod dezho. An ospitalerien a rae war-dro ar re a oa klañv ivez. Fiziet e oa bet enno kestell, evel Krak ar Varc'heien.




↑ Krak ar Varc'heien

Unan eus ar c'hestell bet fiziet en urzh an Ospitalerien etre 1142 ha 1271 pa gouezhas etre daouarn ar vuzulmaned.

Resev a rae an Demplourien profoù e-leizh digant an noblañs dreist-holl : arc'hant, douaroù, aotrouniezhoù, armoù, ken e teuas da vezañ un urzh pinvidik ha kreñv, re greñv... betek 1312, bloavezh ma oa bet diframmet an urzh gant ar pab. En em staliañ a reas an Demplourien e pep lec'h en Europa a-benn kaout skoazell evit o urzh ha roud anezho a gaver e Breizh ivez. Adalek fin ar bloavezhioù 1120 e voent staliet e Breizh

ha skoazellet gant an Duged. Evel-se e voe roet dreistwiriou dezho : an tao-soù, koadoù pe douaroù evel e Naoned e-lec'h ma oa bet savet ur gomandiri. Konan III (1112-1148) a voe an dug kentañ o sikour kalz an Demplourien. Ha goude, en desped d'an trubuilhoù a oa er vro, o doa kendalc'het an duged da vezañ brokus gant an Templ rak reiñ d'an Templ a oa ivez un doare da gaout silvidigezh e ene.



➔ Un Templour

➔ Un Ospitaler



Pa voe bet dismantret urzh an Demplourien e voe roet o madoù d'an Ospitalerien rak ur roll tost d'an urzh all o doa. Diaes eo gouzout war betra e oa perc'henn da vat an Templ e Breizh, dielloù a vank met lod eus an istorourien a soñj e oant perc'henn war 100 lec'h bennak, dasparzhet war bep eskopti war-bouez hini Leon. Dek komandiri a oa ivez, e lec'h ma veve ha labore un tregont a venec'h. O douaroù, tier-feurm alies, a lakaent da dalvezout evit gounit arc'hant. An dederenn eus ar gounidoù a veze kaset d'ar gouent kreiz en Douar santel evit ezhommoù ar brezel.



Selaouit abadenn Radio Kerne : *Deomp de'i* diwar-benn istor an Templ e Breizh.

An urzhioù brezel, etre mojenn hag istor : da ziwall zo !

An istorioù a glever e Breizh, hag e lec'h all, diwar-benn an Demplourien zo diaes da wiriañ rak re nebeut a brouenoù a gaver ha techet eo an dud d'ober eus n'eus forzh peseurt rivinoù ur c'has-tell-kreñv bet d'an Templ. Evel-se ez eus bet savet ur bern mojennoù diwar o fenn pell war-lerc'h ar Grennamzer, en ^{xix}^{vet} dreist-holl... Er mare-se o doa alies an Demplourien brud fall met dalc'hmat e vezent gwelet evel tud ur galloud bras ganto hag ivez evel saverien kastelloù hag ilizoù a-vil-vern.

Da ziwall zo. Kerkent ha kavet un anv-lec'h evel *Kermanac'h* pe *ar Groaz Ru(z)* e soñj re vuan d'an dud ez eus ul liamm dre ret gant an Demplourien. Met, amañ, *manac'h* en anv *Kermanac'h* a c'hall ivez bezañ an anv familh ha netra all... hag ingal e talvez *ru* e-barzh *Kroaz Ru(z)* kement ha *hent*, o vezañ ma vez distaget alies ar ger *ruz* (= al liv) evel *ru* (= *straed*). Kit war al lec'hienn [Kerofis](#) evit kavout skouerioù resis.

Geriaoueg

- **Kroazidi** : marc'heien gristen eus Europa ar C'hornôg a gemer perzh er c'hroaziadegoù.
- **Komandiri** : pennti an Demplourien ennañ ur manati hag un atant.
- **Urzh brezel** : urzh relijiel savet evit difenn ar relijion gatolik.
- **Douar santel** : anv roet gant ar gristenien d'ar c'horn-bro e lec'h m'en defe bevet Jezuz-Krist (gwelit an diell 2 p. 1).

Evit mont pelloc'h

Klaskit en ho kumun pe korn-bro an anvioù-lec'h a c'hallfe bezañ stag ouzh istor an Demplourien pe an Ospitalerien : *Kroaz-ru(z)*, *Templ*, *Ti ruz*, *Kermanac'h*, *An Ospital*, *Sant-Yann*, *Lokrist*... Goude-se, klaskit e levr Guillotin de Corson, *Les Templiers en Bretagne et les Hospitaliers de Saint-Jean de Jérusalem* (1902, adembannadur gant Yoran embanner, 2006) petra e oa e gwirionez.

Gallout a rit dibab ul lec'h meneget war ar gartenn (p. 3) ha klask peseurt roudoù eus an urzhioù-se a chom hiziv an deiz.



↑ An Templ e Breizh : Chapel ar Vadalen e Klison

→ **Kalvar Sant-Maodez** (2,5 km eus Dinan)

Sañset e vefe ar c'halvar-se ur maen-hir bet kristenaet gant an Demplourien staliet nepell alese e parrez Gwilde-Gwengalon. Gwelet e vez warnañ delwennoù marc'heien o pediñ, bep a gleze ganto. Gallout a reont bezañ Ospitalerien ivez.



Klaskomp

1. Petra zo kaoz e oa aet kristenien Europa d'en em gannañ a-enep d'ar vuzulmaned e fin an ^{xv}^{vet} kantved ?
2. E peseurt bloavezh e oa bet kemeret Jeruzalem gant ar groazidi ?
3. Petra eo anvioù ha roll an daou urzh brezel bet savet da-heul ar c'hroaziadegoù ?
4. Peseurt dug eus Breizh a dapas brud e-kerzh ar c'hroaziadegoù ? Perak ?
5. Petra a oa c'hoarvezet gant an Demplourien e 1312 ?